

406

Au fol° 90 recto, seulement le titre :

Dall ar Gwenn

(90 recto)

Divis entre eur c'here hac eur boutaer Koat.  
(42)

(5)

Disput  
Composet a nevez  
entre  
ur C'here,  
hac  
ur Botoer coat.

(91 recto)

Var un ton nevez.

Mar gallay gout ar feçon, e teñin da rima  
Un disput a neve flam, d'en em divertissa,  
Savet entre ar C'here hac ar Botoer coat:  
Pa vent crog en eur boutail int daou pot delicat.

O daou o deus prometet e mige digante,  
Goude formi un disput excellant entrese:  
Un douces vis fritet hac un tam bara guen,  
Hac ur banne da effa en fin ar ganouen.

(6) Mar be glebiet an ancher ar bombard a zono,  
A zilao gant parfeti un darn a resono,  
Vit ho lacat da disput an eil oc'h e guile  
Ha non pas rima netra nemet ar virione.

(91 verso)

Er goan ec'h intentan, eme ar botoer coat,  
E me a zeu da viscan treid an tud delicat,

---

Les folios 91-94 sont constitués par 4 feuillets d'une impression sur feuille volante parue chez V. Guilmer. Les chiffres contre le texte indiquent les pages de l'imprimé.

Ha te q'ereer infam, gant ta botoe ler,  
A zigaz ar c'h[?]envejo hac un n[?]ombr a vizer.

Un tam eo istimet huelloc'h ma etat  
Erit n'ey des da-hini, pot ar botoe coad:  
Ma rancqe beajerien bale gant sorgello,  
Event un anter hirroc'h oc'h ober campagno.

Erit prepari 'n douar da lacat an t[?]evat  
Eo un dra necesser cavet ur boto coat;  
Ne voeler des o palat er parc gant boto ler.  
Ha c'hoas e fell dit laret ne n'on q'et necesser.

Goud a ran eo ar boto coat a gonserv ar yec'het  
Hac a prepari an douar erit lacat an ed,  
Evel ma c'her da reded er parc gant o vejo  
E scan[?]oc'h ar boto ler erit ur sorgellat.

Pa deui an erc'h, hac ar scorn, hac ar goan calet,  
E rancqo ar c'here paca e viraouet,  
Ha me doucho an a c'hant partout er marc'hajo  
Ha te a sello ouzin ha digor da c'heno.

(92 recto) (7) Pa ervuo ar mis meurs hac an neve amzer,  
Da visca an habijo brao hac ar boto ler,  
Neuze na vo istimet netra ar boto coat;  
Ur boto ler da vale a so traou delicat.

Alies e rancq'es mont da dy ar c'hiviger  
Ha na pe nemet tri scoet pe un tri scoet anter,  
Ha me laca assambles bete c'huc'h ugent scoet.  
Da breua ar c'hoat boto erit ar baysantet.

Goel a ze dit, ma mignon, pa deus ur berry arc'hant;  
An neb o deus nebeutoc'h a ver honestamant.  
Me a deb q'ic ha zouben ha ma yod da greis-de:  
Ordinal ec'h intentant on bevet couls a te.

Poent eo din finissa rac an nos a dosta,  
Hac an hostis a jeno pa na effomp netra,  
Hac a roi din hon c'honje, coader ha q'ereer,

408

Da partian, deus he dy ha mont da gaet ar quer.

Ebars en hostaleri e ve rezonio,  
Disput entre ar vignonet ha chass-bleo avecho;  
Ar c'hoste cre a c'hone ebars en bel-affer.  
Mar q'eres ni a velo, eme ar c'hereer.

Goude leis cov e crogjont vel daou ghy animet  
Ha stagan d'en em gannan evel tied malisset,  
Q'en na rang'as an hostis q'emer e vas ribot,  
Ha se'ei voar zin discregui en feson ma oant crog.

(8) Goulennomp eur chopinat d'en em dispartia :  
An hostis hon servijo mar deuomp d'e bea,  
Hac evomp pep a vanac'h e fin ar ganouen ;  
An oll a ranc caout boto pe vale diarc'hent.

(92 verso)

An hini en eus rimet an disput delicat  
Savet entre ur C'here hac ur Botser coat,  
En eus gret meur a hini, e hano Yam ar Gouen,  
Hac a veler ordinal en fin ar ganouen.

FIN

[Feuille volante, papier vergé roussâtre,  
14-8° ; 8 pages.

pages 1-4 : Recit | Composit a nevez | voar eur c'hrim commetet | gant  
potriet an Herec, | juget d'ar maro en 13 a vis ebrel 1840.

pages 5-8 : Disput | Composit a nevez | entre | ur C'here, | hac | ur  
Botser coat.

Au bas de la p. 8, signature de l'imprimeur :

E MONTROUËL, e ty V<sup>r</sup> GUILMER, Imprimer-Librer,  
Guech-all plaç ar pesqet, bremañ ru a Aiguillon,  
hac e traon ru Sant-Maleni. ]